

M. Dornier / Je approuve / M. / vege  
ho 504



124

# CANTIC SPIRITUEL

*En enor an Itron SANTES ANNA AR  
PALUD, ur Plaç Santel a so en Es-  
copty Querne e Parres Plonevez-Porzay  
a dost d'ar mor, var Ton : Santes Mari,  
Mam Doue.*

**M**E ho ped, Tad Eternel, Crouer ar firma-  
mant,  
Roit d'am speret sclerigen, Doue oll-buissant,  
Da zifoloï un Tensor a so e Breiz-Izel,  
Etouez ar Vretonet leun a graçou santel.

Guerc'hes Glorius Vari, me ho ped, ma fi-  
couret,

C'hui, Itron Santes Anna, so enni enoret,  
Evit discleria d'an oll ho craçou excellant  
Hac ar Miraclou a ret, Rozen ar firmamant.

En Escopty a Guerne e bordic ar mor glas,  
E Parres Plonevez-Porzay eus ur sourcen a c'hraç,  
Ur Plaç leun a Viraclou, mar deus var an douar,  
Batiffet en ur blenen dirac an heaul pa bar.

Cals eus a Blaçou Santel a veler batiffet  
D'an Itron Santes Anna, e peb lec'h enoret,  
Balamour ma ra bemdez nombr bras a Viraclou,  
Hac er mor hac en douar e cleo hor pedennou.

Mæs hep choqui nep Chapel so dezi batiffet,  
E deus ur Plaç Santel er Palud benniguet,  
Eleac'h ma zeo enoret guir Vam-goz hor Salver

A

Gant an oll Belerinet demeus a bep carter.

Ar plac-màn fo frecanter gant guir devotion  
Gant ar C'hristenien fidel demeus a bep canton,  
Abalamour ma edeus roet cals foulajamant,  
Ha ma obien ar yec'het da gals tud languissant.

Pobl a Escopty Querne, c'hui a fo eürus  
Da gavet en ho touez guir Vam-goz da Jesus;  
Deut oll da c'houlén outi ar graçou necefler,  
A galon vad d'e fidi d'ho tivoall dioc'h danger.

O Itron Santes Anna! bremâ ma ficouret:  
Pedet ho merc'h ar Verc'hes da rei din ar esperet  
Ma c'hallin dre ho ficour coms eus ho miraclou,  
Hac eus an oll joaufdet a laquet en hor bro.

C'hui hoc'h eus plantet ar ros elec'h ma voa  
ar spern,

Ha gret hent ar Barabos eus a hent an Ifern,  
C'hui hoc'h eus bet distroet pec'herien caledet,  
Hac o laquet da veza tud santel ha parfet.

Me ho supli, tud devot, chelaouet a vremâ  
Coms demeus ar miraclou a ra Santes Anna,  
Ma teuffot oll a galon d'ar Palud d'e guelet,  
Ha ne gollot quet ho poan dre graç Salver ar  
bed.

Eus a Barres Plougastel voa ur Bælec yaouanc  
Privet eus ar guelet, en devoa nec'hamant,  
E spaç eus a dri mis fiouas en ur goal! stat,  
Hep lavaret Oferen gant an drouc daoulagat.

Aliet oue gant e dut raçtal d'en em vouestla  
E Chapel ar Palud d'hor Mam Santes Anna;  
En devez ma c'harruas en deus oferennet:  
Meulet ra vezo Jesus hac e Vam benniguet.

Eus a guichen Ponabat ur certen Plac'h yaouanc

3

Bet tri bloaz gant an<sup>3</sup> derzien, e devoa cals  
nec'hamant ;

Un Navet e deus gret e Chapel ar Palud,  
Bet e deus ar yec'het a-zirac cals a dut.

Eus a Guet a Guemper ur Potric daouzec vloa  
E spaç a dri devez bet gant an divoada,  
E Vam a zispartias offranç a galon vat  
Da Santes Anna ar Palud, raçtal e cef ar goat.

Ur Batimant carguet, var e guenta beach  
Gant ar tourmant attaquet, o tremen bec ar Ras,  
Pedir heur varnuguent bet etre an daou vor,  
Periffa a songent hep gallout en em ficour.

Ar C'habiten, den devot, hac e Vartolodet  
Da Santes Anna ar Palud o deus en em voestlet,  
Dre ar graç a Zoue hac e Vam-goz Anna,  
Rentet e voant e Brest disanger ha gant joa.

Evit e drugarecat, o Vœu o deveus grêt  
Dierc'hen er Palud ha var gorf o rochet,  
Gant pep a piler coar, evit rei testeni  
Eus ho Miracl quer caër, Mam ar Verc'hes Vari.

Un Den yaouanc a Vrest, a ugent vloa oaget,  
Pehini gant ar Vrec'h a gollas ar guelet,  
A ras cals a nec'hamant ha d'e Vam ha d'e  
Dat

Guelet un fort den yaouanc o coll e zaoulagat.

Ur Personach charitabl o alias timat  
D'e voestla er Palud da Vam ar Verc'hes Sacr ;  
Raçtal ma o deus lequet Oferen evintâ,  
E recevas ar guelet dre c'hraç Santes Anna.

En Escopy a Leon e Parres Ploudaniel  
E deus grêt Santes Anna ivez ur Miracl caër  
En andret ur Plac'h yaouanc a fo bet attaquet

Memmes equichen e dor gant ur c'hi arraget.

Ar Plac'h-màn, pa er guelas, a gommanças  
crial :

O Santes Anna ar Palud a invoquas ractal !  
Dre bermission Doue ar chi a lamas timat  
Gant e arrach gant ur mæn, en abimas a voat.

Just eo c'hoas en hoc'h enor parlant eus ar  
graçou

Hoc'h eus obtenet d'ar bopl epad ar c'hlenvejou ;  
An dud oll a diadou fiouaz var ar guele ,  
Antier Hospitalou gant ar c'hlenvet lous-se.

Ar re o deus bet bonheur d'en em recommandi  
Deoc'h en o afflictionou, Mam ar Verc'hes Vari,  
A veler o tont bemdez d'ho Chapel benniguet  
Da drugarecat Doue da veza bet ar yec'het.

Soudardet, Martolodet, ne aller quet nombri  
An niver a ve guelet bemdez var dro ho ti,  
O trugarecat Doue d'o beza preservet  
E creis an oll combajou d'an danger expofet.

Cals so c'hoas a Viraclou pere ne hanvàn quet,  
E deus grêt Santes Anna er Palud benniguet  
En andret tud affliget demeus a bep carter  
Bet foulaget er Palud dre graç Mam hor Salver.

Tud cam, tud dall ha bouzar e deveus fou-  
laget,

O rei ar c'hleout, ar guelet haec an nerz da  
guerzet,

Cals bugale languissant o deus fantet e graç ;  
An oll a receo yec'het enhi bihan ha bras.

Ha Bagou ha Gobirri e deveus preservet ;  
Ha tud couet er mor, pa zint dezi en em voef-  
tlet,

O devez bet recouret o buez dizanger  
 Dre graç Santes Anna, guir Vam-goz hor Salver.  
 Pobl eus a Zouarnenez, me ho ped, ne van-  
 quet quet ;

Pa en em gueffot en danger, troet pront ho  
 speret

Oc'h Santes Anna ar Palud; pedet a galon vat  
 Da zonet d'ho preservi, guir Vam ar Verc'hes  
 Sacr.

Quement en em gaf nec'het gant an affliction,  
 En em voestlet er Palud gant guir devotion,  
 Ha me a ell affuri gant guir fidelite  
 E teuffet joayus d'ar guær, en ur veuli Doue.  
 E pevar c'horn ar c'harter approuvet gant an  
 dut

Ar graçou quen neccesser a receiver er Palud,  
 E Brest hac e Landerne, er Faou hac e Quemper,  
 E fanter ar garantez a Vam-goz hor Salver.  
 Conquerne, Enez-Tudy, Penmarc'h ha Po-  
 nabat,

E Pontecroas, e Goaien e quever testou mat  
 En o afflictionou o deus-hi invoquet,  
 An Itron Santes Anna o deus-y exaucet.

Bep Meurz epad Miz Eost ez eus Indulgeançou  
 E Santes Anna ar Palud, Pardon d'hor pec'he-  
 jou,

An nep a rai a galon ur Gonfession vat,  
 Ha recevo Corf hor Salver gant ur Fei admi-  
 rabl.

Nep en deus devotion da zont d'ar Pardon  
 bras,  
 D'ar Sul diveza a vis Eost ema ar sourcen a graç :

An dez-se e deus choaset hor Mam Santes Anna  
 Evit beza enoret gant oll dut ar vro-mâ.

O cofes, o communia da zevez ar Pardon,  
 E Santes Anna ar Palud, gant guir devotion  
 Eus Indulgeanç Plenier gant ar Pap accordet  
 D'an oll Gristenien fidel a zeu d'e darempret.

Me o supli, Christenien, douguet a galon vat  
 Ur Chapelet en enor da Vam ar Verc'hes Sacr;  
 Deut d'e lavaret a galon bep Meurz, ne vanquet  
 quet,

En enor Santes Anna, e viot recompanset.

Deut muia ma vo possabl d'ar Palud d'e guelet,  
 Da visita he Chapel, he Feunteun benniguet,  
 Ha me assur, goulennet ar graçou a guerrot  
 Gant ur galon preparet, certen e receffot.

O Itron Santes Anna, hor Mam hac hon  
 Itron!

Hon recevet oll bremâ dindan ho protection,  
 Pidot hor Salver Jesus d'or ficour nos ha de,  
 Hac en heur eus ar maro da receo hon ene.

*F I N.*

---

*CANTIC a Veuleudi d'an Itron SANTES  
 ANNA, enoret e Parres Plonevez-Porzay e  
 Chapel ar Palud a dost d'ar mor: var un Ton  
 nevez.*

**M**E hoc'h ador, ma Doue, eus a greis ma  
 c'halon,  
 Hac a rent d'ho Majeste mil benediction

Da veza hon enoret ha carguet a joa,  
Ar graçou accordet d'hor Mam Santes Anna.

O fourcen an oll graçou ha leun a Santelez!  
Recevet hor c'halonou, Mam leun a vadelez,  
Petra bennac ma omp indin eus ho protection,  
Supliet ho Map divin da accordi deomp pardon.

Itron gant Doue caret, Rozen mysteries,  
Ac'hanoc'h eo fortiet Mari Mam da Jesus,  
An hini a voa choaset a bep eternite  
Da garga a jaoufdet an Douar hac an Eê.

C'hui eo ar guir Patronez eus an dut eureuget,  
Hac ar guir Advocades d'an oll Intanvezet,  
Tenzor an oll vertuziou, exempl ar Guerc'heset,  
Hac eur Vam leun a graçou da guement den  
ho ped.

Demeus a greis hon ene ha gant ur guir fi-  
zianç

Ec'hoffromp d'ho carantez oll Rouantelez Franç;  
Pedit Doue da accordi d'ar Roue guir Gristen  
Ar c'hraç da gaout ar victor var e adversourien.

O Itron Santes Anna! bezit Advocades  
Evit ar Brincet Christen hac oll dud ar Palæs,  
Ar Pennou principala a so ous hon difen,  
Obtenet dezo ar c'hraç da fouten al Lesen.

Recevet, Mam benniguet, ny ho ped a galon  
vat,

Dindan ho protection hon Tad Santel ar Pab,  
Ivez ar Gardinalet hac an oll Esquibien,  
Hac an oll dut a Ilis da gresqui al Lesen.

Sicouret, Mam truezus, hon tud en Armeou,  
Astennet ho torn eürus a euc'h ar c'hombajou,  
Chasseet hon adversourien a bell demeus hor bro,

Ma vezzimp fidel d'ho Lesen tre bete ar maro;  
 Obtenet, me ho supli, ô Mam carantezus!

D'ar re so en agoni ur maro eürus,  
 Obtenet digant Doue d'ar groaguez so poaniet,  
 Badiziant d'ar vugale, ha d'ar vam ar yec'het.

Hon tud hac hon oll madou a lequeomp oll  
 gant joa

Dindan ho protection, Itron Santes Anna;  
 Pedet an Dreindet Santel da zont d'hor pardoni,  
 Ma c'hallimp dre ho ficour mont d'an Eon d'e  
 veuli.

*F I N.*